



Sekretour-ez divyezhek ar velestradurezh-lise G/M

Kinnig labour embannet d'an / ar dimanche 26 octobre 2025

Lec'h : **Karaez (29)**

Doare post **CDI** H/F

Deskrivadur ar post-labour

Emañ rouedad Diwan o klask sekretour-ez divyezhek ar velestradurezh-lise (G/M) evit Lise Diwan Karaez.

Dindan atebegzh renerezh an ti skol e kenlabouroc'h gant holl izili skipailh ar lise : renerezh, buhez skol, skipailh kempenn, kelennerien, dilennidi Kuzul merañ al lise. Fiziet e vo ennoc'h kefridioù liesseurt.

Goulennet e vo ganeoc'h ober war dro :

Sekretourva boutin

Degemer an dud war-eeun ha dre bellgomz ha kas anezho e darempred gant an dud dave.

Degemer ha treuzkas al lizhiri.

Degemer ha treuzkas ar mailoù.

Sekretourva pedagogel

Ebarzhiañ an holl ditouroù a bouez evit ar familhoù, merañ an teulioù enskrivañ, kas anezho d'ar familhoù hag ober war dro enrolladur ar skolajidi en diazezoù akademikel. Dreist-holl e barzh SIECLE (Système d'Information pour les Elèves en Collèges et Lycée pour les Etablissements) a zo un diazez pouezus tre evit skoliadur al liseidi.

Darempredañ gant ar rektordi diouzh an ezhommoù : teulioù kelennerien, enskrivadurioù d'an arnodennoù, beajoù...

Sevel pe prientiñ a bep seurt teulioù a sell an ti skol hag e vont en dro, da skouer (listenn diglok) : raktres niver a vugale, yalc'hadoù, treziad diavez (forfait d'externat), steuñv an emgavioù pedagogel.

Kenlabourat a dost gant kontouriezh an ti skol evit a sell faturenniñ ar familhoù ha merañ ar bourchaserien.

Kehentiñ

Sevel teulioù kehentiñ diabarzh/diavez a bep seurt : mail titouriñ (familhoù, kelennerien) pedadennoù, adgalv, sevel rentaoù kont

Bezañ perzh en aozañ a bep seurt darvoudoù a sell buhez an ti skol : devezhioù dizoloiñ al Lise, an dorioù digor, devezhioù degemer evit skolajidi, hag all.

Titouroù all

Deiziad enfredañ : an abretañ ar gwellañ

Doare kevrat : CDI

Padelezh amzer labour : 35e/siz bloazieket

Gopr : diouzh ar skiant prenet

Lec'h labour : Lise Diwan Karaez – Kerampuilh 29270 KARAEZ

Ma z'och dedennet gant ar post, kit war lec'hienn Diwan, ivinell « Dibab Diwan » -> « Labourat e Diwan » ha laoskit hoc'h emstrivadur (CV+Lizher en em ginnig) pe kasit hoc'h emstrivadur da tuta@diwan.bzh

Skiant-prenet ha barrezhioù goulennet

Un diplom war ar sekretourva mui 2 pe 3 bloavezh skiant prenet war an danvez a vo ret kaout evit derc'hel ar post-mañ.

Evit ar post-mañ eo ret bezañ evezhiek, emren-tre, gouest d'en em azasaat ha bezañ aes gant an dud.

Ret e vo deoc'h mestroniañ ar poelladoù-mañ : word, excel, publisher, google workspace.

Bez ho po da implijout ivez poelladoù all a sell merañ an ti skol (Pronote, poelladoù akademiezh). Bez e rankoc'h eta bezañ en ho aes gant an urzhiataerezh.

Evel just eo ret deoc'h mestroniañ ar brezhoneg kenkoulz dre skrid ha dre gomz evit bezañ dibabet, live B2 (DBY) d'an nebeutañ.

Sellout ouzh ar c'hinnig : <https://diwan.versio.fr/br/offres-emplois/secretaire-d-administration-scolaire-bilingue-h-f-271020251656>